

154



GANOUEN

AR PEVAR LAER BRAS,

Crouguet e Roazon evit ho Torfaijou.

—————

Mar plich ganeoc'h ho chilaoufet
 Eur guerz e nevez compost (*Bis*).
 Da bevar den yaouancq eo hi groet
 Pevar eus a bares Plufur,
 Ganet gant ar memes natur
 Guyon Quere, Fanch ar C'halvez,
 An Olier a voa iveau,
 Ha mab ar Mazo eus a Blûnet,
 Ho fevar oant camaradet. } *Bis.*

Eur sul gonde an offeren bred
 E ouant o fevar assignet
 En hon assignont da leïna
 Ha da c'hout peleac'h mont da goania,
 Ma lavarez anê unan :
 Deomp d'ar vereri Kermorvan (*Bis.*)
 Ac'hane e momp guerz hon c'hoan.
 E Kermorvan pa oant arruet
 Divisation a so bet.
 Divisation etreze,
 Da c'haouët piou araug entrese.

En ty pa int bet antreet,
 C'hueza an tan o deveus grøet,
 Hac staga en ho guele
 An eil den coz gant eguile,

000092

— 2 —

Tuchentil a oant er c'hontre,
 Tuchentil nobl a galite
 A ia un deis hep lacquaat mar
 E bars ar c'hoat da chasseal,
 Pa deus digorret ar chaçz redd
 Da Kermorvan hi int bet eat.

Bis.

E Kermorvan pa int arruet
 Eno a aont chomet souezet,
 O vellet frezet an touennou,
 Ha digor francq an dorojou,
 Ha torret tout ar prenechou,
 Ha na voa christen var ho zro.
 E bars an ty pa voue antreet,
 Muyoc'h c'hoas a vone sabbatuet,
 Ho vell staguet ous ho guele
 An daou zen coz leun a vue ;
 Allas ! beuzet en ho taelou
 Eur mors bep un en e c'hinou.

Daou zenic coz deomp leverret,
 Petra ganeoc'h so arruet ?
 An noz me ezoump glac'haret
 Al laëron varnomp a zo bet,
 N'anveomp necun eus an ê
 Meït al leër bras Guyon Quere (*Bis.*).
 Ac e c'hamarad Fanch ar C'halvez ;
 N'autrou Kerlavar evel ma glevas
 Var c'heïn e ronce a pignas,
 Var c'heïn e ronce eo pignet,
 Etreze Cavan int bet eat.

Hostises Cavan d'in leveret
 Un nozvès ha me a vo repuet ?
 Comodite avoalc'h so em zi
 Evit un nosvès d'ho repui.
 Logerien ne m'eus quet irie
 Nemeit al laër bras Guyon Quere (*Bis.*).

154

— 3 —

Hac e c'hamarad Fanch ar C'halvez.
 P'an deus aveuret ho c'hezec
 Etreze Roazon int bet eat,
 Pa voant en ur tisquen e Kær
 Ho rencontras an Olier.

000093

N'autrou Kerlavaz a c'houenne
 Digant hostizès Cavan goudeze :
 Hostizès Cavan lavaret,
 Un nosvès ha me eve repuet?
 Comodite avoalc'h zo en zi
 Evit un nozvès d'ho repui.
 Logerien irie ne mens quet
 Nemeit mab ar Mazo a Blûnet ;
 D'ar prison da Roazon int caçzet
 Da c'hortos da vea juget (*bis*).
 Evit ma vezint distruiget.

Guyon Quere a lavare
 Er bas huella ar squeul pa bigne :
 Itroun Varia a Greisquer,
 Beza favorabl d'am c'hêver,
 Etre Montroulez ha Guennet,
 E voa great ma c'henta torfait
 E tizoloï try-c'huec'h pignon,
 O va Doue pebez eštoun !
 Quen a lavare an dud eus ar c'hontre , { *bis*.
 Hemàn so eun tan a bers Doue.

Etre Montroulez ha Guennet ,
 Tri-c'huec'h gret vrazès am boa lazet.
 Evit gout an occasion gaute ,
 Penaus o touguen ho pugale ;
 Pedet evidoun mignoune
 Ha ma losquet en traon pa garet.
 Fanch ar C'halvez a lavare
 Er bas huella ar squeul pa bigne :

— 4 —

Itroun Varia a Greisquer { *bis.*
Beza favorabl d'am c'hever.

Pa oam' en oad a drizec bloa,
 Defaut d'am zad va c'horrigea,
 Chomet a voa var e vele clàñ,
 Me a c'huezas an tan var nezàn,
 Me a c'hezas au tan var ma zad,
 Pa ne faute da Zoue e c'houantad.
 Pedet evidoun va mignounet
 Hac eus a bep crim divoallet.
 Dreist oll draou n'em imitet quet { *bis.*
 Ha ma losquet en traon pa garet..

An Olier a lavare
 Er bas huella ar squeul pa bigne :
 Itroun Varia an Dreindet,
 Me a ya d'ar maro hep sujet, { *bis.*)
 Biscoas netra am boa laeret
 Quen a voa eun egen a bevar troad-guen,
 Ha laquaat eur c'horden en c'herc'hen!
 Pedet evidoun va mignounet { *bis.*
 Ha ma losquet en traon pa garet.

Mab ar Mazo a lavare
 Er bas huella ar squeul pa bigne :
 Itroun Varia a Greisquer,
 Beza favorabl em c'hever.
 Pa oamp er guer en ty va zad
 Me a rae d'am vam un tieguez vad,
 Ha ma lavaras dinme me un deiz :
 Ma vab, na oc'h quet un den tre,
 Ma vab, out quet un den quer,
 Ma pa na teus quet ur cibouer;
 Ha me er vont var e c'homziou
 Ha redas en Ilis Plougasnou.

Pa arruis en Ilis Plougasnou,

— 5 —

Na voa christen ebet var e zro,
 Ha me er vont incontinent
 Diouc'h-tu e digorrî armel ar sacramant.
 An armel pa voa digorret
 Ar cibouer ganin digaçzet
 Eur mouëz oc'h an èe am boa clevet :
 Ar mab ar Mazo o deus laeret,
 An traou-ze ne ouant quet great mad,
 Pa ne ouant quet ho taouarn daouarn sacr.
 Pa oam e tond gantùn d'ar guær
 Me a digorri ar cibouer.

154


Me o caouet eno try-c'huerc'h hosti,
 Me ho debras d'am tijuni,
 Ne cleman den eus va cherend
 Quen neubeut eus va mignounet,
 Mæs mab ar Bris eus a Plouber,
 Hennès a garfen a vize em c'hever,
 Hennès a lavares din me eun deiz :
 Clasquet din eur buguel divade,
 Hac e discas din secrejoù nevez;
 Me vont var hent bras Caraez,
 Me rancontras ur vreg douguerez
 O distrei eus offeren a veurez.

Ha me meus outi goulenet,
 Ped mis bugale a zougouet?
 Var ar bord a sez mis anter,
 Nequet echu c'hoas an amzer ;
 Ha me a tennas va chontel
 A zrohas ar c'hreg rez e vanden, (*bis*).
 O cavet danvez eur c'hristen.
 Pa arruis e bars Plouber,
 Ne oa quet mab ar Bris er guer,
 Ne oa quet er guer mab ar Bris,
 Me zollas an èn en eur parc a træz.
 Cri a vige ar c'halon a vige

000094

— 6 —

A biou ar parc a dræz nini a tremenge
 Er clevet ar buguel incessamant
 E c'houlen oleo ar vadiziant.
 Pa arruis mab ar Bris er guer
 Me ô querc'bel dezo ar buguel,
 Hennès o deus disquet dime
 Un nombr bras a secrejou nevez,
 Pedet evidon va mignonet
 Ha ma losquet en traon pa garet. { *bis.*



ORDRENANÇZ

*A disparity ar Gonscryet yaouancq 1834-1835
 eus a Guemper, an dec a vis Querzu 1840.*

Var an Ton galée : *La Parisienne.*

Conscript eus ar Vreiz-Izel
 Deut eo urz evit partial
 Evit mōnet diouc'h-tu d'ar brezel,
 Partiomp inutil eo songeal,
 Qen na vo querend ha mignonet,
 Qen na vo d'ar c'henta guelet,
 Deut eo urz ar Roue
 Evit mont d'an arme
 Da chaçzeal ar Sauzonet en ho c'hontre,
 Ha da souten hon droajou. (*bis*).

C'hoas e zeus ouspenn ar Sauzonet
 Rac be a zo dija pell amser
 E momp e ioues ar barbaret